

YF_0010_Biskoaz am-boa c'hoarzet kemend-all

Biskoaz am-boa c'hoarzet kemend-all
'Vel e Poullaouen an deiz-all
O ta ma doue, ma doue, ma doue
O ta ma doue, petra doue eta

'Weled ar biniou gand ar person
E-barz ar gador o sermon

'Benn eur pennadig goude-se
'Weled ar vombard gand ar hure

Hag ar sakrist gand ar bladenn
O tougen chistr d'ar sonerien

'Weled an hini goz o ribotad
Serret ganti he daoulagad

Seiteg pe driwec'h logodenn
Lammas er ribot war o 'fenn

Mar lar ar mevel d'ar vatez
Sach war o lost ma teuint er-maez.